

# Deiziadoù pouezus istor Breizh

## Programm 6<sup>ved</sup>

**56 kent JK:** Trec'h ar Romaned war ar Wenediz: dont a ra an Arvorig da vezañ dindan aotrouniezh Roma.

**IV<sup>re</sup> - VII<sup>vet</sup> kantved:** Enbroadeg ar Vretoned en Arvorig: Gant ar c'hoant dizoloñ takadoù nevez hag abalamour da gwaskerezh an Angled hag ar Saozon e tec'h kuit lod eus ar Vretoned eus o inizi war-zu an douar bras.

**845:** Trec'h Nevenoe war ar Franked e Ballon: dont a ra Breizh da vezañ unvan ha dizalc'h. Nebeut war-lerc'h e teu Roazhon ha Naoned da vezañ stag ouzh Breizh.



## Programm 5<sup>ved</sup>

**XIV<sup>vet</sup> kantved:** Brezel hêrezh Breizh: e-kerzh brezel Kant vloaz e tarz h enebiezh e Breizh etre ar re a fell dezho kaout un emglev gant ar Saozon hag ar re o deus c'hoant tostaat eus ar C'hallaoued.

**1532:** Breizh staget ouzh Frañs: war-lerc'h marv Anna Vreizh e teu Breizh da vezañ staget en un doare ofisiel ouzh rouantelezh Frañs.

**XVI<sup>vet</sup> ha XVII<sup>vet</sup> kantved:** Oad aour Breizh: dont a ra Breizh da vezañ unan eus broioù pinvidikañ Europa, strujus eo an ekonomiezh, stank an eskemmoù.

**1675:** Emsavadeg ar bonedoù ruz: en em sevel a ra ar Vretoned a-enep kresk an taosoù urzhiet gant Loeiz XIV. Flastret eo an emsavadeg gant arme ar Roue Heol.



## Programm 4<sup>re</sup>

**1789 -1799:** Dilemel Stadoù Breizh: D'ar 4 a viz Eost eo votet fin an dreistwiriou ha fin gwiriou Breizh. 5 departamant krouet e plas an 9 eskopti hengounel. Emsavadeg ar Chouaned a-enep ar Republik.

## Programm 3<sup>de</sup>

**1941:** Bro an Naoned distaget diouzh Breizh gant gouarnamant Vichy.

**1977:** Skol Diwan kentañ krouet e Lambaol-Gwitalmeze.

